

MERZERINTI SANT LORANS.

War don : *Ele ann ene, deut d'ann douar*, pe donio 9, 25 ha 27 Dom Herry.

Ann otro sant Lorans merzer
A zo mad he gemer da skouer
Ha rei da Zoue eveltan
Enn hon c'halon ar plas kentan.

O ia! Khristenien, her c'hredet,
Dreist da gement tra zo er bet
Sant Lorans mad hag evuruz
En deuz bet karet he Jezuz.

Skler walc'h en deuz-an diskouet
Ann deiz oa bet merzeriet :
War dan ar bourrev a drec'he
Ann tan euz karante Doue.

Ann dekved a viz est, enn Rom
Elec'h oa d'ar c'houlz-ze o chom,
Bla daou c'hant eiz hag anter kant,
D'ann deiz-ze e varvaz ar zant.

Gwall vrezel oa neuze c'hoari :
Valerien, ar mac'her kri,
En defoa laket enn he benn
Lazan dre-oll ar Ghristenien.

Pa roaz urz d'ho frizonian,
Ar Pap santel er penn kentan,
Da c'hortoz bean bourreviet,
Sant Lorans a oa gwall nec'het.

Gwelan re leiz he zaou-lagad
Ha drec'hel da grial : « Ma zad,
» Ma c'haset genac'h d'ar maro
» M'ho heulim beteg enn Euvo. »

Ar Pap respontas evelenn :
« Ma map, beet dinc'h agrena,
» Ar pezh hoc'h euz c'hoant a vo groet ;
» Abenn tri devez em heulfet ;

» C'hoaz zoken ho merzerinti
» Vo kaeroc'h evit ma hini ;
» Rak kreiz ho nerz oc'h c'houi, map ker,
» Ha d'am noad koz e tinerzer.

» Distroet buan war ho kiz,
» Klasket mat danve ann iliz
» Ha lodennet oll d'ann dut paour,
» Ann ed, ann arc'hant hag ann aour. »

Ar zant penn da benn a zentaz,
Ha chetu raktal e teuz
Unan abeurz Valerien
Hag a laraz d'ar Ghristenien :

« Genac'h chomo ann Aviel,
» Ho pern komjo kaer ha santel.
» Red vo d'ac'h, vat ! rei ho mado
» Da Valerien, ma otro.

» Sant Lorans laraz evelenn :
» N'ho po ked anc eunn eskenn :

» An traou-ze oll zo et d'ober
» Aluzenno, ma otro ker. »

Ann den-ze a iez droug ennan
Pa glevaz ar c'helou fall-man,
Ken a laraz garo spontuz :
« Lorans, diuac'het ho Jezuz.

» Ne n-oc'h ket hep bean klevet
» Eo bet d'ann oll gourc'hemennet
» Gant Valerien, ma otro,
» Dont d'ezensi hon doueo. »

Sant Lorans respontaz buan :
« Otro paour, koll a ret o poan,
» Rak me enn bev hag enn maro
» Vo Jezuz hep ken ma Otro.

» Biken ezenz digenin, vat !
» N'ho defo ho skeudenno koat ;
» Me ra goab euz doueo pri
» Dare da gouean war ho fri ;

» Daoust d'ho c'haerded a ziavez
» N'ho deuz ked a c'halloudegez ;
» Ann diaoul hell ho kas oll gantan,
» Ha marteze c'houi ar c'hentan. »

War ze teuz gand an treitour :
« Lorans, eme-an, komzer flour,
» Traon walc'h hoc'h euz laret din-me :
» Ne chomina ket pell enn ho tle.

» Prim aman, potred ; c'houeet tan,
» Eunn tan na zevo ket buan,
» Eunn tan a boac'ho divalo
» Ma bado hiroc'h he boanio. »

Sant Lorans eunn tammik goude
Peuc'huz war he c'hrit a lare :
« Ann tu-man, otro, zo poaz mat,
» Troet egile da boac'hat. »

Goude c'hoaz laraz evelenn :
« Tanvaet kig ar Ghristenien
» Evit gout, mar keret dibri,
» Ha gwelloc'h eo poaz evit kri. »

Soufr a reaz enn gwir Ghristen
He verzerinti penn da benn
Kalonek mad, hep klemm-ebet,
Ken a oa ann oll souezet.

Dre ann tol krenv-se ar Romiz
Oe peur-c'honnet d'ann Iliz,
Ho foz doueo diskaret :
Sant Prudanz hen deuz lavaret.

Otro sant Lorans gallouduz,
Teurveet goul digant Jezuz,
Ha digand he vamm ar Werc'hez
Gras ma varvimb er zantelez.